

KIS-722 – Al. Thesis, *thetisch* en Anadennoniezh

(GE – 05 05 01)

Termenoù alc'houez eus prederouriezh HUSSERL eo an daouad *Noesis–Noema*. Tro hon eus bet d'ober anv anezho alies e-kerz an 35 bloaz tremenet abaoe ar pennad a embannis war *Lavar 01*¹ ma roen da Al. *Noesis* ar c'hevatal Br. *ergorañ* ha da Al. *Noema* ar c'hevatal Br. *ergorad*. Gant an daou dermen-se avat e chomer en amgant maezienn an emouezañ — degasadenn bennañ HUSSERL d'ar preder eo meizad ar *cogitatum*, an *ergorad*, an *Noema* enmanus d'an emouezañ end-eeun. Troet emañ an emouezañ ouzh an traoù er bed, bukañ (Al. *meinen*, *vermeinen*) a ra outo, a lavarar c'hoazh : o *ambredañ* a ra². An emouezañ ouzh an traoù ned eo ket ur stadañ gouzañvat, un ober eo, ur gwezhiañ a zo anezhañ *amparañ* ar bed (HUSSERL a ra anv a *Konstitution*, Br. *amparadur*).

“Ar goulenn a sav, evel ma sav dirak kement prederour a loc'h diouzh an emouezañ, eo hemañ : penaos e c'hell ar spered lakaat-ez-eus-eus-ar bed — *dodiñ* ar bed — pa chom ar bed bepred en trehont dezhañ ? Pe e gerioù boutinoc'h : ar bed n'emañ ket e 'm spered, penaos e c'hell va spered derc'hel ar bed da wir ? HUSSERL a respont : « an *dodiñ* bed zo ur c'hrediñ. » N'eo ket *krediñ* er ster gwan : « *krediñ* a rafen a-walc'h ez eus ... », « bez' e tle bezañ, peogwir ... », pe c'hoazh : « *krediñ* a ran ez eus eus ar bed peogwir en en merzhan », hogen er ster-mañ : « peogwir e kredan er bed, peogwir e kretaan ar bed, eo en en merzhan. » Ur c'hrediñ diazez eo, leun ha kreñv, ar *bongrediñ* (Al. *Urglaube*, *Urdoxa*)³.”

Ober a ra HUSSERL gant an daou genster Al. *Glaube*, *Doxa* ha deverañ diwar an amprest gresianek-mañ an adanv Al. *doxisch* — a-dal dezho e 'm eus kinniget ober gant

¹ “Tri modekadur ar c'hrediñ hervez Husserl”, La-01, *Preder* 79-81, 1966, pp. 63-74.

² “An devezout, hervez Husserl, a c'hoarvez en e von a vukañ ouzh pe a ambredañ un ergorenn drehoutus d'ar gwezh he ampar” (KIS-346, La-08, p. 348) ; sl. ivez KIS-565, La-11, p. 424.

³ “Tri modekadur ...”, id., *ibid.*, p. 65. Degaset hon eus abaoe, e-kichen Br. *krediñ*, *bongrediñ* e ster HUSSERL, an termenoù dibarekoc'h Br. *koaliñ*, *bongoaliñ* (sl. KIS-354, La-09, p. 50 ; KIS-501, La-10, p. 396 ; KIS-551, La-11, p. 327 ; KIS-576, La-12, p. 86).

Br. *krediñ*, *koaliñ*, *koaladel*. A du 'rall e-kichen Al. *Thesis*, e ra gant ar pennanor Al. *setzen*, ar pennanvioù Al. *Position*, *Setzung*, an adanvioù *thetisch*, *positional* (hag an deverad *Positionalität*), *setzbar*. A-dal dezho e kinnigan ober gant ar pennanorioù ha pennanvioù Br. *dodiñ*, *dodad*, *lakaat*, *lakadur*, an adanvioù Br. *dotat*, *dodadel*, *lakadel* (hag an deverad *lakadelezh*), *dodadus*, *lakadus*.

Koaliñ (*krediñ*) ha *dodiñ* (*lakaat*) zo enta an daou arvez eus keñver ar spered ouzh ar bed. E-touez modoù an *dodiñ* ez eus unan a zo *andoniek* (Al. *originär*) : ar merzhout. Dre ar merzhout e vez dodet bezoud an traoù er bed. Stag ouzh ar merzhout e kement ha ma 'z eo *dodiñ* bezoud (*Daseinsetzung*) andoniek ez eus modekadurioù : ematersiñ, arvarsiñ, nac'hañ, kounañ, an holl anezho “gwezhiou « o lakaat » boud, « dotat »¹” pa zaveont d'ur boud gwirion (bet) merzhet. Hemañ eo an diforc'h etre ar merzhout hag ur modekadur « o lakaat boud » : un *dodiñ gweredel* (Al. *aktuelle Thesis*) eo ar merzhout hag un *dodiñ galloudel* (Al. *potentielle Thesis*) eo ar modekadur, ar c'hounañ da skouer. Ur c'hemm diazez avat a zegasas HUSSERL etre an *dodiñ* bezoud ez eo ar merzhout (ha dre vras nep *dodiñ* galloudel o lakaat boud) hag un *hepdodiñ bezoud*, un *heplakaat boud* anvet gantañ *Neutralitätsmodifikation* (Br. *modekadur neptuiñ*). Neptuiñ zo lemel pep nerzh eus ar c'hoaliñ bed ; hemañ a lakaer etre krommelloù hag empentiñ ken plaen ha tra (*sich-bloß-denken*), dec'hmegañ, errizhañ a reer pezh a zisoc'h anezhañ hep perzhiañ ennañ. E-touez an neptuadurioù emañ ar faltaziañ, ar poltrediñ. Pouezañ a ra HUSSERL war ar poent-mañ : pep modekadur eus al lakaat boud a c'hell bezañ neptuet ; an disoc'h eus neptuadur ar bed zo ur bed errizhet glez (*eine bloße Phantasiewelt*) a zo dec'hmegel ennañ, neptuet, ar “merzhout” en “ro” hag ar “merzhadoù” kendaveat, ar “c'hounañ” hag ar “c'hounadoù”, h.a. Dont a ra HUSSERL da gevenebiñ al lakaat boud, al *lakadelezh*, hag an neptuiñ, an *neptuadelezh*². Da heul, e paouez a arverañ “lakaat” ha “dodiñ” evel kensterioù : astenn a ra erdal an *dodiñ* d'an neptuadelezh, oc'h ober eus an *dodiñ* neptuat ur *peuzdodiñ* (« *gleichsam* »-*Thesis*).

“Pep emouezañ zo « dotat » pe ent weredel pe ent galloudel. Ar *meizad diagent* a « lakadur gweredel » ha gantañ *meizad al lakadelezh* a zegemer dre se un astennad a-genglot. Alese, emañ hon c'helennadur war an neptuiñ hag e geñver ouzh al lakadelezh dedalvezet da vezad astennet an *dodiñ*. Da heul, e-barzh an emouezañ *dotat* dre vras, hag eñ kefleuniet pe get, emañ ar modekadur hollek a anvomp neptuadel, hag emañ war eeun

¹ “Es sind *Seins*-« *setzende* » Akte, « *thetisch* »” (HUSSERL, *Ideen I*, § 103, [214]).

² War *Lavar 01*, pp. 69 hh. e raen gant Br. *neptuel*. Hogen an *Neutralität* o vezañ disoc'h an *Neutralisierung* e kavan reishoc'h *neptuadel*, *-ad-* o tec'heriañ an ober.

ennañ evel henn : diouzh un tu hon eus naouusteret an dodadoù lakadel en doare-mañ : bez' ez eus anezho dodadoù pe weredel, pe e tro da vezañ gweredel ; dre se o devez ergoradoù lakadus « ent werc'hel » — lakadus ent weredel e ster astennet ar ger. En tu enep, er ster ankewer, emañ ar « peuz»dodadoù, dasskedoù dinerzh, divarrek da ensammañ nep gwezhiañ dodat ent weredel evit a sell o ergoradoù, ar re-mañ o vezañ neptuet end-eeun.»

“Jedes Bewußtsein ist entweder aktuell oder potentiell « thetisches ». Der frühere Begriff « der aktuellen Setzung » und mit ihm der der Positionalität erfährt dabei eine entsprechende Erweiterung. Darin liegt : Unsere Lehre von der Neutralisierung und ihrer Beziehung auf die Positionalität überträgt sich auf den erweiterten Begriff der Thesis. Also dem thetischen Bewußtsein überhaupt, ob es nun vollzogenes ist oder nicht, gehört zu die allgemeine Modifikation, die wir die neutralisierenden nennen, und zwar direkt in folgender Weise. Auf der einen Seite haben wir die positionalen Thesen dadurch charakterisiert, daß sie demgemäß « wirklich » setzbare Noemata haben — aktuell setzbar im erweiterten Sinne. Dem stehen gegen über die uneigentlichen, die « gleichsam »-Thesen, die kraftlosen Spiegelungen, unfähig irgenwelche aktuell-thetischen Vollziehungen hinsichtlich ihrer, eben neutralisierten Noemata in sich aufzunehmen” (Husserl, Ideen I, ¶ 117, [242-243]).

AN DODIÑ HUSERLEK HAG AR C'HEDOUENZAÑ

Adeiladet eo anadennoniezh HUSSERL war studi an emouezañ evel amparer ar bed — an emouezañ o vezañ roet da lec'h nemetañ an anaout, ar werc'helezh o vezañ daouek : diouzh un tu an dangorenn bur (*das reine Ich*), blein trehontel an emouezañ, diouzh an tu all ar bed, ergorenn an emouezañ. Hogen an emouezañ n'eo ket ar mod anaout nemetañ. An anaout dibaotañ eo zoken, o naouiñ evel un darvoud eus an anaout boutinañ, an anaout anemouez. A-walc'h ez eus bet diskouezet e c'hoarvez an darn vrasañ eus realoù mab den, hep komz eus realoù al loened, war vod ar c'hedouezañ, eleze hep ma ve dispartiet dangor hag ergor¹, hep ma ve dodet boud evit adkemer troienn HUSSERL. An dodañ boud andoniek e unan, ar merzhout, a ranker meizañ evel un eskoriñ adalek ur saviad ma ne vez troc'h ebet etre dangor hag ergor, ma vez unan danvez merzhiad ha danvez merzhed, ma ne c'hell enta bezañ dodañ boud ebet. HUSSERL koulskoude n'en deus ket dianavezet ar realoù kefleuniet war vod ar

¹ A-zivout *kedouezañ*, sl. KIS-577, La-12, p. 100, n. 7 ; a-zivout an *troc'h dangor-ergor* hag an *anemouez*, sl. La-09, -10, -11, -12, -13 dre ar menegvaoù.

c'hedouezañ, hogen meiz a ra warno dre o gougevaniñ ouzh “drekleur ar merzhout” en ur reiñ dezho staelad un dodiñ galloudel.

“Pep merzhadenn [...] zo dezhi he drekva merzhadel. An dra anc'havaelet a-zibar zo dezhañ un amgelc'hiad trael o kenanadiñ ent verzhadel, en ur zioueriñ nep dodiñ bezoud dibarek. An kez amgelc'hiad ivez « a revez ent werc'hel », ken emouez eo ma c'hell — e ster ur galluster gwezadel — ar sell o todiñ boud gweredel durc'haat outañ. Koulz lavarout ez eus anezhañ un unvez a zodadoù galloudel.”

“Jede Wahrnehmung hat [...] ihren Wahrnehmungshintergrund. Das speziell erfaßte Ding hat seine perzeptiv miterscheinende, besonderer Daseinsthesen ermangelnde dingliche *Umgebung*. Auch sie ist « wirklichseiende » Umgebung, sie ist so bewußt, daß sich — im Sinne einer Wesenmöglichkeit — aktuell seinssetzende Blicke auf sie richten können. Sie ist gewissermaßen eine *Einheit potentieller Setzungen*” (Husserl, Ideen I, ¶ 113, [230-231]).

“[...] ur gredenn, ur gredenn werc'hel « zo o loc'hañ » ; krediñ a reomp endeo, « kent dimp e c'houzout ». Heñvel dra e c'hoarvez a-wechoù lakadurioù plijadur pe zisplijadur, c'hoantoù, devredadoù zoken, o vevañ endeo kent dimp « bevañ » « enno », kent dimp kefleuniañ ar c'hogito ent strizh, kent d'ar me « emdeurel » da varn, da gaout plijadur, da c'hoantaat, da vennout.”

“[...] ein Glaube, ein wirklicher Glaube « regt » sich ; wir glauben schon, « ehe wir es wissen ». Ebenso sind unter Umständen Gefallens- oder Mißfallenssetzungen, Begehungen, auch Entschlüsse bereits lebendig, ehe wir « in » ihnen « leben », ehe wir das eigentliche cogito vollziehen, ehe das Ich urteilend, gefallend, begehend, wollend « sich betätigt »” (Husserl, Ideen I, ¶ 115, [236]).

Gl. *thétique, non thétique* E PREDER MERLEAU-PONTY

MERLEAU-PONTY, oc'h emvataat eus hentenoù anadennoniezh HUSSERL, a embregas dezrannañ ar merzhout. Hogen, hep paouez a welout ennañ an dodiñ boud andoniek evel ma rae e ziaraoger, e troas e breder ouzh geneliezh ar merzhout. Tra ma spire da HUSSERL komz eus “drekleur ar merzhout”, a “zremmwel”, “dodet ent galloudel”, e ra anv MERLEAU-PONTY eus “buhezañ kezivik” (*expérience primordiale*) andodat (*non thétique*), ragergorel, ragemouez, rakdassellek. Hervez HUSSERL e oa kevastenn an dodiñ d'an emouezañ ha d'an anaout ; evit MERLEAU-

PONTY ne oufe deraouiñ an dodiñ nemet gant an emouezañ dassellek. Notomp e luskell hanc'herieg MERLEAU-PONTY pa ra, evit aroueziñ an dec'havaelañ ragergorel, rakverzhadel enta, gwech gant *expérience originale*, gwech gant *perception originale*¹.

“Poellad un dasselliñ gwiziadek, eleze an hini mennet da emveizañ e unan, a c'hoarvez ent diac'hinek a zaskavout buhezadur andassellek ar bed, evit adlec'hiañ ennañ emzalc'h ar gwiriañ ha gwezhiadennoù an dasselliñ hag evit ober d'an dasselliñ naouiñ evel ur galluster eus va boud. Petra hon eus en derou enta ? [...] ur meni maezienn verzhout war ur goueled a ved. N'eus amañ tra dodennet ebet. Nag an ergorenn nag an dangorenn n'int dodet. [...] naouiñ a ra pep gwezh merzhout evel gorreet diwar un englenadur bloc'hel ouzh ar bed. E kreiz ar reizhiad, ur galloud da astaliñ ar c'hehentadur pe ac'hoel d'e argrennañ, dre harpañ hon sell ouzh un darn eus an arvest, o ouestlañ dezhañ ar vaezienn verzhout a-bezh. [...] Hogen gwelet hon eus ez eo ar merzhout andoniek ur buhezadur andodat, ragergorel ha ragemouez. [...] E buhezadur an dra eo e kavo eorizh dassellek an devezout dodat e ziazez. An dasselliñ ne biao enta e ster leun nemet mar gra reiz war ar goueled andassellek a raklaka hag a emvata anezhañ, hag a zo dezhañ evel un tremened orin, un tremened na voe biskoazh ur bremañ.”

“La tâche d'une réflexion radicale, c'est-à-dire de celle qui veut se comprendre elle-même, consiste, d'une manière paradoxale, à retrouver l'expérience irréfléchie du monde, pour replacer en elle l'attitude de vérification et les opérations réflexives, et pour faire apparaître la réflexion comme une des possibilités de mon être. Qu'avons-nous donc au commencement ? [...] un certain champ perceptif sur fond de monde. Rien ici n'est thématiqué. Ni l'objet ni le sujet ne sont posés. [...] chaque acte perceptif s'apparaît comme prélevé sur une adhésion globale au monde. Au centre de ce système, un pouvoir de suspendre la communication ou du moins de la restreindre, en appuyant notre regard sur une partie du spectacle, en lui consacrant tout le champ perceptif. [...] Mais nous avons vu que la perception originale est une expérience non-thétique, préobjective et préconsciente. [...] C'est dans l'expérience de la chose que se fondera l'idéal réflexif de la pensée

¹ Hevelep etredaouiñ notet e *Ph.P.* (1945) ne gaver mui e *V.I.* (1964), sl. KIS-524, La-11, pp. 115 hh. & KIS-617, La-12, pp. 324 hh.

lennet hon eus a-zioc'h, anv a ra eus ar “meni maezienn verzhout” ma “n'eus tra dodennet ebet”.

“[...] evezhiañ zo [...] amparañ un ergorenn nevez oc'h ezplekaat hag o todennañ ar pezh na naoue betek neuze nemet evel dremmwel ansavelet.”

“[...] l'attention est [...] la constitution d'un objet nouveau qui explicite et thématise ce qui n'était offert jusque-là qu'à titre d'horizon indéterminé” (MERLEAU-PONTY, *Phénoménologie de la perception*, p. 39).

“Evit bezañ abeg [...], e rank an abeg bezañ kantaezet e kement ha henn. Se moarvat ne dalvez e nep doare e rank bezañ derc'het ent dodennel hag ezplekaet evel e tro ar c'hevareizhañ.”

“Pour être motif [...], le motif doit être éprouvé comme tel. Certes, cela ne signifie nullement qu'il doive être thématiquement conçu et explicité comme dans le cas de la délibération” (SARTRE, *L'Être et le Néant*, p. 152).

NOTENNOU YEZHOURIEZH

Reiñ a rin amañ un alberz eus ar c'hudennoù yezhouriezh a gejer ganto er rann-mañ eus ar Brederouriezh hag eus an danvez diskoulmoù a 'm eus kinniget.

Br. **dassellat**, **dassellek**, **dassellel**. Niverus eo an adanvioù deveret diwar Br. *dasselliñ*, *dassell*, re anezho o vezañ damheñvelster : *ar gouzrec'h dassellat* "ar gouzrec'h o tasselliñ" ; *buhezadur dassellek* "buhezadur a zo an dasselliñ o ren warnañ" ; *prederouriezh dassellel* "prederouriezh dezverket gant al lec'h bras roet enni d'an dasselliñ". Merkomp ez eo damheñvelster *dassellus* da *dassellat*, *dasselladel* da *dassellel*.

Br. **dodat**, **dodadel**. Kemm a lakaer etre an adanvioù oc'h aroueziñ un ober (*derc'hañ dodat* "derc'hañ a zo un dodiñ") hag an adanvioù o taveiñ d'un ober (*mod dodadel* "mod dezverket gant an dodiñ"). Heñvel gemm etre *neptuat* ha *neptuadel* (*dodiñ neptuat*, *modekadur neptuadel*), h.a.

Br. **dodennañ** "ober un dodenn eus, kemer da zodenn" ; damheñvelster : *ambredennañ* "ober un ambredenn eus, kemer da ambredenn".

Al. **noetisch**, **noematisch**. Ar gudenn o sevel gant an daou dermen-mañ a denn d'an treanviñ a reer boas evit deverañ adanvioù diwar bennanorioù :

Xañ/iñ Ø *Xad* Ø *Xadel*. E tro Br. *ergorañ* (Al. *Noesis*) avat, ez eus bet roet d'ar pennanv Br. *ergorad* ar ster arbennik a zo hini Al. *Noema*, ken ma teufe Br. *ergoradel* da gevatal war un dro da Al. *noetisch* ha da Al. *noematisch*. An tun eeunañ evit hepkoriñ an trap eo deverañ an adanv diwar ar pennanor war eeun hep treanviñ. Daou hent a vez pleustret evit stagañ ul lostger (pe un dibenn) ouzh ur pennanor pe un dreistrez *Xañ/iñ* (< hBr. *Xam/im*) : kemer da bennrann (pe da vonad) a) *Xa-* (*nesañ* Ø *nesaelezh*), *Xi-* (*dimeziñ* Ø *dimeziou*), b) *Xañ(v)-*, *Xiñ(v)-* (*nesañ* Ø *nesañved*). Hogen un adanv *Xael* deveret diwar ar pennanor *Xañ* a ve en arvar a vesk gant an adanv deveret diwar ar pennanor *Xaat*, ha dre zamant d'ar resisted e kinnigfen deverañ diwar *Xañv-*, reiñ enta da Al. *noetisch*, *noematisch* ar c'hevatalioù Br. *ergorañvel*, *ergoradel*.

GOUDENOTENN

Tro 'm eus bet d'ober war-dro kealioù an *emouezañ* hag an *dodiñ* :

E La-01, p. 58, n. 1 ma verken an dislavar etre kelennadurioù HUSSERL ha MERLEAU-PONTY-SARTRE war ster *non thétique, thétique, positionnel*.

E KIS-545, La-11, p. 281, n. 1 ma klasken, hep berzh bras, despizañ staelad an *emouezañ hep dodañ* etre an *dodañ* huserlek hag ar *c'hedouezañ*.

E KIS-646, La-13, p. 114-116 ma arzaelen ar respont roet gant Julia KRISTEVA d'an aters : mard emañ an *Ego cogito* o todiañ ar bed, petra zo o todiañ an *Ego* e unan ? Aters kantrat, met gwall zispredet ar respont roet gant an aouzourez (e 1968) : amparet e vez an *Ego* gant an daelerezh enien d'an danvez, an kez daelerezh o ren ivez en diemouez freudek hag e stourm ar renkadoù...